

8N2-4-023

GUERZENNOU

EVIT PELERINED

SANTEZ ANNA VENED



VENED

MOULLET E. J. GALLES, MOULLER AN ESKOPTI

1913

Prix : eur guennek

### BENEDICTUS

BENEDICTUS Dominus Deus inimicorum nostrorum liberati, \* quia visitavit, et fecit redemptionem plebis suae : In sanctitate, et justitia coram

Et erexit cornu salutis nobis : \* in domo David pueri sui. In ipso, \* omnibus diebus nostris.

Sicut locutus est per os sanctorum, \* qui a saeculo sunt, ante faciem Domini parare vias Prophetarum ejus : Et tu puer, Propheta Altissimi vocaberis : \* praebis enim

Salutem ex inimicis nostris, \* Ad dandam scientiam salutis plebi ejus : \* in remissionem peccatorum eorum :

Ad faciendam misericordiam cum patribus nostris : \* et Per viscera misericordiae Dei nostri : \* in quibus visitavit nos, memorari testamenti sui sancti, oriens ex alto :

Jusjurandum, quod juravit Illuminare his, qui in tenebris, ad Abraham patrem nostrum, \* et in umbra mortis sedent : \* ad daturum se nobis : dirigendos pedes nostros in

Ut sine timore, de manu viam pacis. — Gloria Patri.

### MAGNIFICAT

Magnificat \* anima mea Dominum.

Et exultavit spiritus meus \* in Deo salutari meo.

Quia respexit humilitatem ancillae suae, \* ecce enim ex hoc beatam me dicent omnes generationes.

Quia fecit mihi magna qui potens est, \* et sanctum nomen ejus.

Et misericordia ejus a progenie in progenies \* timen- tibus eum.

Fecit potentiam in brachio suo, \* dispersit superbos mente cordis sui.

Deposuit potentes de sede, \* et exaltavit humiles.

Esurientes implevit bonis, \* et divites dimisit inanes.

Suscepit Israel puerum suum, \* recordatus miseri- cordiae suae.

Sicut locutus est ad Patres nostros \* Abraham et semini ejus in saecula. — Gloria Patri.

### ITRON SANTÉZ ANNA

#### Diskan :

Itron Santez Anna,  
Mirit ho Bretoned,  
Goulennit dreist pep tra  
Ma vemp fidel hep ret.

1. Deomp da Santez Anna,  
Ia! deomp oll, Bretoned;  
Eno an nep a ia  
Ganthi zo-chillaouet.

2. Evidomp, o na sked  
Ha levezet ive,  
Pen deuz hor c'hemeret  
Evit he bugale!

3. Evidomp-ni a splan  
He c'harantez vrasa;  
Etrezomp hi a rann  
He burzudou kaera.

4. O nag a glanvourien  
En em erbet dezhi,  
Hag er goasa anken  
A gav zikour ganthi!

5. Peñ guezh n'euz-hi rentet,  
O madelez dispar,  
D'an den dall ar guelec,  
Arc'hleyed d'arrevouar!

6. Peñ guezh var ar mor braz  
Da dud o vont da goll,  
P'hi fedont, a zigas  
Avel mad en eunn taol!

7. Itron Santez Anna,  
Da viken trugarez!  
Ni a zeuio gant joa  
D'ho kuetet bep bloavez.

8. C'houi, tud guendre an oad,  
Na zoujit ket an hent,  
Ganthi goulennit mad  
Mervel evel ar zent.

9. Tud jaouank, ha da vad  
A c'houll karout Doue,  
It da c'houlenn-timat  
Miret glan hoc'h ene.

10. Deut c'houi mamou tener,  
Evit hoc' pugale;  
Diouthi kemerit skuer:  
Hi zo bet niam ive.

11. Guerc'hezed, deut d'he zi  
Hi n'ho tisprujo ket;  
Mam ar Verc'hez Vari  
A gar ar guerc'hezed.

12. Ha c'houi, labourerien,  
Gant an drevel goasket,  
Deut da lareñ ho poen:  
C'houi en deuz dibabet.

13. N'e ket d'an den ouz ker.  
Gant dillad-zei guisket,  
Nan! mes d'eul labourer,  
Endeuz n'em ziskouezet.

- |                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                         |                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                              |
|---------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|
| <p>14. Ha c'houi'ta, mordaïdi,<br/>Ken lies en danjer,<br/>D'ho sikour pedit-hi,<br/>E kreiz ar goall-amzer.</p> <p>15. Dreist d'ho pen pa zavo<br/>Ar mor he goagnenou,<br/>D'ez-hi vit m'ho koarno<br/>Goestlit ho kalonou.</p> <p>16. Navern gant pescort gloaz<br/>A vefec'h tourmantet<br/>Hi a gennerez eaz-bras<br/>Ar c'horf hag ar spered.</p> | <p>17. Vel eur pirc'hirinded<br/>A dremen hor buez ;<br/>Evel d'han eo kaled,<br/>Leun a dristidigez.</p> <p>18. O mam ar vretoned<br/>Pioun'hokarenhorbro?<br/>Ra vimp ho pobl karet<br/>Breman, varc' hoaz, atol</p> <p>19. Grit d'eomp-ollder'c'helmad<br/>D'ar feiz e pep mare,<br/>Ma vo Jezuz dalc'h-mad<br/>Hón tad hag hor roué.</p> |
|---------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|

### SANTEZ ANNA, HOR PATRONEZ.

*Diskan :*

Santez Anna, hor patronez,  
Hor sikourit en danjer,  
Ha bezit hon alvocadez  
Dirag Jezus hor Zalver.

1. Saludomp gant devozion.  
An Itron Santez Anna,  
Leveromp dezhi a galon  
En he chapelik ama :
2. Santez Anna, mam ar Verc'hez,  
A dra zur zo galloudus :  
He merc'h en env zo rouanez,  
Gwir mam d'hor Salver Jezus.
3. P' b-unan da Santez Anna,  
Gant fizians en he boaniou,  
A velomp oc'h en em voestla  
Hag o vont d'he chapeliou.

4. Ar vam eyit he bugelik,  
D'an Itron Santez Anna  
A ra bemdez eur bedennik,  
Hag a zesk dezhan kana.
5. Ar soudard o vont d'an arme  
D'an Itron Santez Anna  
En em erbedo, a neuze  
A gerzo en eur gana.
6. Ma teu an tourmant da c'houeza,  
Ar martolod a bedo  
He batronez Santez Anna,  
Ha dizoursi a gano.
7. Al labourer var he dachen,  
Evit en em ziskuiza,  
Dioc'h he dal a sec'h ar c'houezen  
Hag en em ro da gana.
8. Ar pastor e barz ar menez,  
He zenved en dro deza,  
Lies a veach d'he Batronez  
Oc'h euz klevet o kana.
9. O vont d'ar mintin d'he zervez,  
Ar micherour a bedo  
Santez Anna he Batronez  
Ha gant fizians a gano
10. E pep korn euz a Vreiz-Izel  
An Itron Santez Anna  
E deuz ean iliz, eur chapel ;  
Deomp oll di da bardouna.

11. Evel hon tud koz, Bretoned,  
 Henoromp Santez Anna,  
 Pe'z omp klanv, pe'z omp ankeniet,  
 Ne skuizomp ket o kana.

## SANTEZ ANNA, O MAM GARET

### DISKAN :

Santez Anna, o mam garet  
 Ha Patronez ar Vretoned,  
 Goulennit 'vit ho pugale  
 Chom fidel da lezen Doue.

1. Santez Anna n'ankoueo ket  
 Ez omp he bugale karet,  
 Penaoz epad hon oll huez  
 Hi servijimp gant karantez.
2. Pegement a dud ankeniet  
 Zo ganthi bemdez konfortet  
 N'euz ket d'en 'evit niveri  
 Ar ré glanv guelleet ganthi.
3. Ar ré dall a gav ar guele  
 Hag ar ré vouar ar c'hleved,  
 Teod ar re vud drugareka  
 Gant levenez Santez Anna.
4. Ar pec'her paour digalonet  
 En he chapel en deuz pedét ;  
 Gouelèt en deuz he fall vue  
 Ha kavet karantez Doue.

5. E peb ezom, pa hi e'haver  
 Ken mad ato en hor c'hever,  
 Da Rouanez a Vreiz-Izel  
 Dalc'homp oll da veza fidel.
6. E bro Arvor a bell amzer  
 E veler meur a chapel gaer,  
 Mez iliz nevez Keranna  
 Drest oll eo an hini gaera.
7. Redek a rer euz tro-var-dro  
 D'ar pardouniou a zo er vro,  
 Mez e chapel mam ar Verchez  
 E ve pelerined bemdez.
8. He limaj hag hani Mari  
 Zo en dro d'ar groaz e pep ti.  
 Ha diraz-he noz ha mintin  
 En em doaler var an daolin.
9. Ar c'hroadurik en he gavel  
 Ve goestlet d'an Itron zantel  
 Ha kentiz hag e hell kerzat  
 Ve kaset d'hi zrugarekat.
10. Var ar mor ha var an douar  
 E pep danger, e pep glac'har  
 Ne gaver ket eur guir vreizad  
 O chomreb pedi he vam vad.
11. O mam, doc'h falloni ar bed  
 Goarnit kalon ar Vretoned  
 Rak karout reomp'vel tud koz Breiz  
 Mervel kentoc'h 'vit koll ar feiz.

12. En draonien ma leun a zaelou  
Roit d'eomp skoazel en hor poaniou  
Pedit evidomp deiz ha noz  
Ma'z imp ganoc'h d'ar baradoz.

## SANTEZ ANNA, MAM A GARANTEZ

### Diskan :

Santez Anna, mam a garantez,  
Taolit varnomp eur zell a druez !

- |                                                                                                            |                                                                                                                   |
|------------------------------------------------------------------------------------------------------------|-------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|
| <p>1. Kanomp a youez huel<br/>Mam goz hon Doue ;<br/>Ni oll, e Breiz-Izel,<br/>'Zoh e bugale.</p>          | <p>6. Martolod 've klevet<br/>Pa dreuz ar mor doun :<br/>« Santez Anna Vened,<br/>« Pedit evidoun ! »</p>         |
| <p>2. Itron Santez Anna,<br/>Klevit hor peden ;<br/>Ni a zeu da gana<br/>Anna 'neur vanden.</p>            | <p>7. Pleget var an dachen,<br/>Labourer douar,<br/>Evel pep guir gristen,<br/>Bepred a lavar :</p>               |
| <p>3. Anna da zaoulina<br/>Ebarz ho chapel,<br/>Itron Santez Anna,<br/>Ni 'zo deut a bell.</p>             | <p>8. O klask eun tam bara<br/>E harz toul an or,<br/>Kap, paour Santez Anna<br/>Tegavo digor.</p>                |
| <p>4. Santez Anna Vened,<br/>Bennoz d'hoc'h hanol<br/>O va mam benniget,<br/>Diouallit hor bro.</p>        | <p>9. Dirak Santez Anna,<br/>Paour ha pinvidik,<br/>It'a da zaoulina.<br/>C'houi tud reuzeudik.</p>               |
| <p>5. Soudarded Breiz-Izel<br/>Ken stard en emgan,<br/>A c'houlen ho skoazel<br/>Pa vent kreiz an tan.</p> | <p>10. D'an dall ro ar guelede,<br/>Nerz d'anzar digalon,<br/>D'ar bouzar ar c'hleved,<br/>Peoc'h d'an anaon.</p> |

- |                                                                                                             |                                                                                                          |
|-------------------------------------------------------------------------------------------------------------|----------------------------------------------------------------------------------------------------------|
| <p>11. Kaout a ra ar pec'her<br/>Distro da Zoue.<br/>Ha dirag he varner<br/>Truez d'he ene.</p>             | <p>14. Kuzit hor bugale,<br/>O va mam zantel,<br/>Keit a ma vo arne<br/>Dindan ho mantel !</p>           |
| <p>12. It, tad, mam ha bugel,<br/>It, tud an Arvor,<br/>Divrec'h ho mam zantel<br/>Deoc'h oll zo digor.</p> | <p>15. Keit ha ma vo bleuniou<br/>E bruk ar menez,<br/>D'hor mam hor c'halonou<br/>Zalc'ho karantez.</p> |
| <p>13. Va mam ! ephor brogeiz,<br/>Guechal bro ar zent,<br/>Renevezit ar feiz<br/>Evel ma voa kent.</p>     | <p>16. Eun deiz, en he c'hichen<br/>Ra vezimp eurus,<br/>Ra ganimp da viken :<br/>Bennoz da Jezuz !</p>  |

## MAM AN ITRON VARIA

Ton : *Mari, mam a esperantz*

Mam an Intron Varia,  
Ha mam a Vretoned,  
O Itron Santez Anna  
Ni ho karo bepret. (*bis*).

- |                                                                                                                    |                                                                                                                            |
|--------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|
| <p>1. Hanvet oc'h het a bell-ze<br/>Patronez Breiz-Izel,<br/>Hag a viskoaz hon tado<br/>Deoc'h a zo bet fidel.</p> | <p>4. Arc'hlanvourgant an derzien<br/>Dalc'het var he uele,<br/>En deuz great deoc'h eur beden<br/>Hag a zo deut pare.</p> |
| <p>2. Vel hontud koz Bretoned,<br/>Hor fianz ar vrasa<br/>Enoc'h e lakomp bepret,<br/>Itron Santez Anna.</p>       | <p>5. Var ar meaz e Breiz-Izel<br/>Pa feller diskuiza,<br/>Ouz an env a rer- eur zell<br/>O tont oll da gana :</p>         |
| <p>3. Zellit etal ar c'havel<br/>Ar vam-se daoulinet ;<br/>Pedi ra vit he bugel<br/>Santez Anna Vened.</p>         | <p>6. Setu ar mor o kroza,<br/>Daoulinet, martolod,<br/>Da bedi Santez Anna :<br/>Hi ho reno d'an od.</p>                  |

- |                                                                                                                                                                                                                    |                                                                                                                                                                                                                               |
|--------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|-------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|
| <p>7. Var eur mor leun areier<br/>Oump siouaz herbed-ma;<br/>Dioualit hor hag dister,<br/>Itron Santez Anna.</p> <p>8. Chelaouit var ar mène<br/>Ar mesaer o kana<br/>Ho meuli e ra ive<br/>Itron Santez Anna.</p> | <p>9. Ar zoudard kreiz ar brezel<br/>A hed Santez Anna<br/>Ha pa vezo red mervel<br/>E teui c'hoaz da gana.</p> <p>10. Bugale gez da Eva<br/>Ni a glask hon guir-vro;<br/>O Itron Santez Anna,<br/>Hor c'hasit d'an envo!</p> |
|--------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|-------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|

### GUERZ AR VARTOLODED

VAR DONN : Kerzit m'æl gardien.

Itron Santez Anna,  
Mam garet Breiz-Izel  
Greit ma vimp dreist pep tra  
D'hor feiz bepret fidel.

- |                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                    |                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                               |
|----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|-----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|
| <p>1. Patronez Breiz-Izel<br/>Ouzoc'h hor beuz rekour,<br/>Tollit varnomp eur zell<br/>Ha reit d'eomp ho sikour.</p> <p>2. Itron leun a zouster,<br/>En hon oll ezomou<br/>Diskoët en hor c'henver<br/>Galloud ho pedennou.</p> <p>3. Ho kalon zo digor<br/>Vit ar vartoloded;<br/>Ni a zo tud a vor.<br/>Mam vad, hor chilaouët.</p> <p>4. Pa zav an houlennou,<br/>Draist hor bagig dister,<br/>Klevit hor pedennou,<br/>Hor mirit a zanjer.</p> | <p>5. Hor micher hon laka<br/>En danjer bras bemde;<br/>Itron Santez Anna,<br/>Dioualit hor bué.</p> <p>6. Hor c'horf hag hon ene<br/>C'hoestlomp d'ho madelez<br/>O Mam a lein an ñe<br/>Ouzomp bezit truez.</p> <p>7. Goulennit ma vezimp<br/>Guir-gristenien-nerzus,<br/>Hag ato ma heuillimp<br/>Lezen zantel Jezuz.</p> <p>8. Hon dioualit, o Mamm,<br/>Diouz ar pec'hed marvel,<br/>Vit m'hor c'havo divlamm<br/>Ar barner eternel,</p> |
|----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|-----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|

Gallout e hrer hoaz kano ar memes guerzen var eun ton all, gant an diskan-ma :

<p>O mam garet Hon dioualet</p>	<p>D'och en danjer E peb amzer.</p>
-------------------------------------	-----------------------------------------

### KRISTENIEN DA VIKEN

#### Diskan

D'hor Mamm Santez Anna,  
D'an Itron Varia,  
D'hor Zalver benniget  
Ni vo fidel bepret!

- |                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                            |                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                     |
|--------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|-------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|
| <p>1. Hor c'haloun bacour mantret,<br/>Gant glac'har hag enkrez,<br/>Ni a zo daoulinet,<br/>Diraz-hoc'h c'houi, Guerc'hez!</p> <p>2. Kurun hag avel foll<br/>Var-n-omp so dirollet,<br/>Hor bro'zo vont da goll,<br/>Truez! Mamm benniget.</p> <p>3. Lezen Doue, guechall,<br/>A rene-kaer ar vro;<br/>Hirio lezen tud fall<br/>He stleij eun d'ar maro.</p> <p>4. Vel eur vanden chas mud,<br/>Gant kounnar, noz ha deiz,<br/>Emaint e-touez ann dud<br/>O klask mouga ar Feiz.</p> <p>5. Ni zo guir gristenien,<br/>Krouadurien Doue.<br/>Savet enn he lezan<br/>Enn he zupjanz ive.</p> | <p>6. Ni a zo kristenien,<br/>Prenet gant goad Jezuz,<br/>Maget dre c'hourc'hemen,<br/>Gant he gorf presius.</p> <p>7. Kristenien, hor baniel<br/>A zo kroaz hor Zalver,<br/>Ni er zao soun'n huel,<br/>Bemdez, e peb amzer.</p> <p>8. Eur brezel kriz meurbed,<br/>Zo great d'hor bugale,<br/>Ah! n'ho dilezit ket,<br/>C'houi zo ho mamm ive.</p> <p>9. Ar falla kenteliou<br/>Zo roet d'ezho bepred,<br/>Koll a rainj ho eneo,<br/>Eskolan Drouk-Spéret.</p> <p>10. Sempl, dinerz, ker bihan,<br/>Ma na vent diouallet,<br/>Abred, hep kals a boan<br/>Da goll e vent kaset.</p> |
|--------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|-------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|

- |                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                        |                                                                                                                                                                                                                                                                                                                                              |
|----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|
| <p>11. Petra d'ar guisiegez,<br/>Mar kollomp hon ene?<br/>Ar skiant, ar furnez<br/>A deu d'omp euz an ne!</p> <p>12. Guechall hon tadou koz,<br/>Brudet'vit ho furnez<br/>A glasker Baradoz<br/>Araok pep guisiegez</p> <p>13. Skianchou'zo netra,<br/>Pa'z deont enep Doue,<br/>Ni fell d'omp dreist pep tra<br/>Savetei hon ene.</p> | <p>14. Guerc'hez, hor Mamm zantel,<br/>Roit sikour hep dale,<br/>E plegou ho mantel,<br/>Kusit hor bugale.</p> <p>15. C'houi a zo gallouduz,<br/>Var gatoun hor Zalver,<br/>Bezit madelezuz<br/>C'houi'zo eur vamm dener.</p> <p>16. E pevar c'horn a vro,<br/>Neuze, ni holl, Guerc'hez,<br/>Beteg heur hor maro,<br/>Ni a gano bemdez!</p> |
|----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------|

### LITANIYOU AR VERC'HEZ

Kyrie, eleison.  
Christe, eleison.  
Kyrie, eleison.  
Christe, audi nos.  
Christe, exaudi nos.  
Pater de cœlis Deus, miserere nobis.  
Fili Redemptor mundi Deus.  
Spiritus sancte Deus, miserere nobis.  
Sancta Trinitas unus Deus, miserere nobis.  
Sancta Maria, ora pro nobis.  
Sancta Dei Genitrix,  
Sancta Virgo yirginum,  
Mater Christi,  
Mater divine gratiæ,  
Mater purissima,  
Mater castissima,  
Mater inviolata,  
Mater intemerata,  
Mater amabilis,  
Mater admirabilis,

Ora pro nobis.

Mater boni consilii,  
Mater Creatoris,  
Mater Salvatoris,  
Virgo prudentissima,  
Virgo veneranda,  
Virgo prædicanda,  
Virgo potens,  
Virgo clemens,  
Virgo fidelis,  
Speculum justitiæ,  
Sedes sapientiæ,  
Causa nostræ lætitiæ,  
Vas spirituale,  
Vas honorabile,  
Vas insigne devotionis,  
Rosa mystica,  
Turris Davidica,  
Turris eburnea,  
Domus aurea,  
Fœderis arca,  
Janna cœli,  
Stella matutina,

Ora pro nobis.

<p>Salus infirmorum, Refugium peccatorum, Consolatrix afflictorum, Auxillium Christianorum, Regina angelorum, Regina Patriarcharum, Regina Prophetarum, Regina Apostolorum,</p>	<p>Regina Martyrum, Regina confessorum, Regina Virginum, Regina Sanctorum omnium, Regina sine labe originali concepta, Regina sacratissimi Rosarii.</p>
-------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------	-----------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------------

### LITANIYOU SANTEZ ANNA

Santez Anna, pedit evid-omp.  
Santez Anna, mam ar Verc'hez Vari konsevet hep pec'hed, pedit evid-omp.  
Santez Anna, pried sant Joachim, pedit evid-omp.  
Santez Anna, mam gaer sant Jozeb, pedit evid-omp.  
Santez Anna, savet a gerent rouaned, pedit evid-omp.  
Santez Anna, patronez ar Vretoned, pedit evid-omp.

Santez Anna, goulennit evid-omp ar c'haera grasou.  
Santez Anna, deskit d'eomp zenti deuz lezen Doue.  
Santez Anna, deskit d'eomp en hor poaniou bea pasiant.  
Santez Anna, deskit d'eomp e kenver en holl bea truezus.

Santez Anna, difennit en Iliz diouz hec'h adversourien.  
Santez Anna, diouz chadennou safan tennit ar bec'herien.  
Santez Anna, en holl ezomou zikourit ar gristenien.  
Santez Anna, d'ar porz dizanjer digasit ar vorærien.  
Santez Anna, en hent mad dalc'hit ar veachourien.

Santez Anna, roit iec'hed d'ar re glanv.  
Santez Anna, roit sklerder d'ar re dall.  
Santez Anna, roit ar gonz d'an dud mud.

Santez Anna, roit ar c'hleved d'an dud bouar.  
 Santez Anna, roit konfort d'an dud poaniet.  
 Santez Anna, roit zikour da neb en em erbed diouzoc'h.  
 Santez Anna, roit ho pennoz da vro Breiz evit ma vo  
 herpet fidel d'he Doue ha d'he feiz guirion.  
 Santez Anna, roit ho pennoz d'ar veleien, evit ma vo  
 talvoudus ho labouriou zantel.  
 Santez Anna, roit ho pennoz d'ar leaned ha leanezed evit  
 ma veint trech da falloni ha da gounar ho enebourien.  
 Santez Anna, roit ho pennoz d'ar visionerien, evit ma  
 c'hounezint ar baianed d'ar lezen gristen.  
 Santez Anna, roit ho pennoz d'ar vugale, evit ma veint  
 savet e doujanz Doue.  
 Santez Anna, roit ho pennoz d'ar zoudarded, ha mirit  
 diout-ho da goll ho ene.  
 Santez Anna, roit ho pennoz d'ar belerined, ha chilaouit  
 diouz ho fedennou.

PEDEN

O va Doue, roet ho peuz da zantez Anna ar c'hras  
 de vea mam d'er Verc'hez glorius Vari; greit ive, dre  
 de fedennou ha dre meritoù hor Zalver Jezuz-Krist ma  
 tigouezimp hep dale e joaiou ar baradoz.

PEDEN EN ENOR D'AR VERC'HEZ HA DA ZANTEZ ANNA

Me ho salud, Mari, leun a c'hras, en aotrou Doue a  
 zo ganeoc'h; ra vezo ganeomp ho kras. C'houi zou ben-  
 niget dreist an oll groaged; ra vezo benniget ive santez  
 Anna a behini ez oc'h ganet hep pec'hed, O Guerc'hez  
 Vari, mam Jezuz-Krist mab an Tad Eternel, pedit  
 evidomp.

PEDEN EUR VAN EVIT HE BUGALE

Santez Anna, guir skuer ar mamou kristen, goestla  
 a ran d'oc'h va bugale. Gouzout a ran penaoz Doue eo  
 en deuz ho roet d'in ha penaoz da Zoue emant bepred;  
 setu perak a c'houennan ganeoc'h evit-ho hag evidoun  
 va-unan ar c'hras da veza bepred prest da blega da  
 volonteze Doue.

O mam garet, roit ho pennoz d'ar vugale kez-se.  
 O-mam garantezus pourveit d'hon ezomou. Ne d'eo ket  
 enoriou ar bed na madou an douar a c'houennan evit-  
 ho; digenta, lakeit e kalon va bugale eun donjer braz  
 diouz ar pec'hed; ho felleit diouz an droug, hag ho  
 diouallit diouz kontamm ar bed. Diskoueit dezho karout  
 Doue egiz-o peuz hen diskoueit ho c'hunan, a vibannik,  
 d'ar Verc'hez glorius Vari.

GLORIA in excelsis Deo, et in terra pax hominibus  
 bonæ voluntatis. Laudamus te Benedicimus te. Ado-  
 ramus te. Glorificamus te. Gratias agimus tibi propter  
 magnam gloriam tuam : Domine Deus, Rex cœlestis;  
 Deus Pater omnipotens, Domine Fili unigenite, Jesu  
 Christe : Domine Deus, Agnus Dei, Filius Patris. Qui  
 tollis peccata mundi, miserere nobis. Qui tollis peccata  
 mundi, suscipe deprecationem nostram. Qui sedes ad  
 dexteram Patris, miserere nobis. Quoniam tu solus  
 Sanctus : Tu solus Dominus : Tu solus Altissimus,  
 Jesu Christe : Cum sancto Spiritu, in gloria Dei Patris.

Amen.



CREDO in unum Deum, Patrem omnipotentem, factorem cœli et terræ, visibilium omnium et invisibilium : Et in unum Dominum Jesum Christum, Filium Dei unigenitum : et ex Patre natum ante omnia secula : Deum de Deo, lumen de lumine, Deum verum de Deo vero : genitum, non factum, consubstantialem Patri ; per quem omnia facta sunt ; qui propter nos homines et propter nostram salutem descendit de cœlis ; et incarnatus est de Spiritu Sancto ex Maria Virgine : et homo factus est ; crucifixus etiam pro nobis : sub Pontio Pilato passus, et sepultus est ; et resurrexit tertia die secundum Scripturas ; et ascendit in cœlum ; sedet ad dexteram Patris ; et iterum venturus est cum gloria judicare vivos et mortuos, cujus regni non erit finis : Et in Spiritum sanctum Dominum et vivificantem : qui ex Patre Filioque procedit. Qui cum Patre et Filio simul adoratur et conglorificatur ; qui locutus est per Prophetas : Et unam, sanctam, catholicam et apostolicam Ecclesiam. Confiteor unum baptisma in remissionem peccatorum : et exspecto resurrectionem mortuorum, et vitam venturi seculi.

Amen.

1903. — Imprimatur :

JÉGOUZO, *Vikar braz.*

---